

481

(416, suite)

Chanson neverz,
Var sujet an arc'hant.

Var un ton ancien.

(417)

Me ho ped oll, asistantet, da selaou mad va chanson,
Caout a rest enni, me gred, un nebeudic a rêson;
Mes na zit get d'en em choqi deus ar pezh ho po clêvet,
Rac ne meus, me en assur dec'h, c'hoant da choqi den ebet.

Clêvet a rân deus a bep tu nombr a dud o vurmuri
Var ar chenchidiguez arc'hant a zo ret effectui;
Louiset aour, peziou scoët, daou scoët, peziou c'hoec'h, daouzeg guennec,
Ha pèvar guennec varmuquent, a zo cuezet var o beg.

Bureauyou zo digor dre oll evit chench dec'h hoc'h arc'hant,
Rac se, va mignonet, n'ho pezh nep sourci na nec'hamant;
Berza ho pezo en echanh peziou brao uquent real,
Zo calz èzetoc'h da gonta hac en peb feçon leal.

Sonjit nac a drein ho poa-hu er marc'hajou, er foariou,
Nac a zispoutou a zave evit tremen ho peziou!
Darn a c'houle pèvar guennec, ha re all pezh vit pezh,
Hac alies e c'hoarverze meur a seurt fallagries.

Mes brêmâ ne vezo quelet en hor bro quer eus a Franç
Nemet arc'hant ès da gonta, trugarez ar Brovidanç!
Ar peziou aour, ar re arc'hant a vezo mad ha leal,
E plas an arc'hant ancien, alies a rije fall.

(418)

Goulennit digant ho tadou nac a boan o d'oa quechal
O tîrqi conta. Mes hirio, dre ar system decimal,
Ec'h ellit hep nep genamant ~~ob~~ en nebeut amzer
Ho contchou ar re diessa en eur feçon meurbet selên.

Bremâ sur e vezo ranqet digorach an arc'hant, an aour,

482

Ha maleurusamant disqueuz p'ezoar pinvidie pe haour.
 Meur a hini a vo souezet o clêvet oll dre hon bro
 Avanturioù arc'hant curzet, ha meurbet a estono.

Mes, pa zonzân en uzquiller, n'ellân miret da c'hoarzin,
 Ouz er quelet qer glac'haret, prosternet var e zaoulin,
 O proqat d'e aour, d'e arc'hant, curzet gantân da loueda:
 E galon a zañll en e za, e mian prest da fatica.

O va feziou qêz! emezân, va c'halon ha va ene!
 Va oll attachamant d'ar bed: ia, te eo va Doue!...
 « Pell diouzân, peorien infam! tud er boan hac er chagrin!
 » Amâ e zoun var va arc'hant, amâ gant joa e varvin. »

Evit guir e zeus lavaret e voa an arc'hant ato
 Eur mad souveren ar brassa e peb amzer, e peb bro;
 Rac gantân bepret e tizer d'ar but ma hon deveus c'hoant,
 Ha disterroc'h equet netra e zeo un den hep arc'hant.

Un dervez em boe eur proces hac am darabuste mad,
 Ha me da gass va faperou gant joa vras d'am avocad;
 Ar mestr fripon, pa o guelas, n'elle get lenn ar scridou,
 Mes daou bez daou scoët a rois da serrich da lunedou. (419)

E ty eun noter e zoun bet gant va c'hos habit bertlench,
 O c'houlon hac én a elje eus va arc'hant ober chench;
 Mes va faour qêz habillamant na frise get mad d'e vin,
 Na commenças gant disprisanç dindan va fri da c'hoarzin.

Evel eur faour-qêz reuzjudic, va zoc em dorn hac em za,
 An noter a c'houlon ouzin ha calz a beziou em boa:
 « Bez a c'heus-te, va faour-qêz, tri pe bevar bez daou scoët?
 — Aubrou, a respontis dezân, deg mil a meus dastumet. »

Cetu va den, em eur joa vras, o qerc'hat din eur gador,
 Hac ouz va zrêti, m'oc'h assur, gant peb soign, gant peb enor.
 O va arc'hant! a zonzis-me, pebes pourtear ac'heus-te,
 Pa elles, em eur minuter, renta poli evelse!...

Hoc ho pez ar speret brassa hac ho coalc'h eus a furnez,
 Assur, dilezet e vezot, rac se n'ho pez nep soiez:

Arc'hant ! arc'hant ! bepret arc'hant , pe ne dalvezot netra ,
Ha bepret e vezot sellet evel eur paour qès petra .

(420) Guechal Suisset en em rentas en audians eur roue ,
Da c'houlen arc'hant digantan abalamour da Roue !
Yalc'h ar roue voa disec'het , hac en respont : na meus get .
Mes Tartaif prest a replicas : Pas arc'hant ? pas a Suisset .

En eur antren er bed paour-mâ , eo ret digueri ar yalc'h ;
Pa zemerer ha pa varver e ranqer c'hoas rei ho coalc'h ;
Anfin , ne zoar evit ober netra hep an diaoul arc'hant ;
Hac e vez rognnet ar peziou , outo bepret e zeus c'hoant .

Martez e ne ouzoc'h-hu get perac eo rond ar peziou ?
Eleal c'hoant voa ma ruilljont dre in oll rouantelezoù ;
Rac neo get vit en entervi e zeo bet grêt er quis-se ,
Anes , ec'h ellit credi mad , e vije bet grêt carre .

Daou scolaer yaouanq o tistrei d'ar guer vit ar vacançoù ,
A velas eur men var bini voa tracet lizerennou ;
Unan ane a guerz ato , hep ober nep cas a ze ,
Mes equile a chom eno , ha rêson bras en devoe .

Ar c'hompou-mâ prest a lennas : « Arma e mâ va ene . »
Ar pautr yaouanq , oll estonet , a zonch un dra dindan ze .
Tenna ra ar men , hac e fouill down bras ebars an douar .
Ha gant eur joa vras e lennas demeus sclerijen ar loar :

(421) « Te pehini oc'heus goierzet donet er vad d'am c'hompren ,
» Gemer ar vouest zo dirazout , tach d'e lagat var da benn ;
» Cass anezan ganes d'ar guer , hac e po contantamant ,
» Rac caout ari , pi'en digueri , dasuzec mil scoët en arc'hant . »

Mar d'oar euruz dre an arc'hant , e zeo assur pa deuer
Da zoulaji an infortun evel bepret mén dleer ;
Rac ma sant an den obliget eur joa vras en e galon ,
An hini a oblich ivez zo euruz en peb feçon .

Clêvet a meus comz a un den demeus a eur voyen vras ,
Hac en devoa calz mignonet , vel a veler hirio c'hoas ;
Hep aale gant nombr maleuriou e voe en oll revinet ,

484

Ha ractal e faus mignonet o d'oe oll en dilezet.

P'en em velas abandonet gant an oll en e vizer,
En em gar obliget neuze da c'houlm e voued dre gutter.
Astem ra e zorn disec'het d'an dud en d'oa obliget;
Mes refuset e vae ganto, ha gant humor chasseet.

Beuzet neuze en e zaelou ha treantet a c'hlac'har,
E cri eus a fons e galon : « Adieu, mignonet barbar !... »
E benn stouet var e beultrin, en eur stat eus an trista,
Eur soulajamant prest a sant : e guy deu d'en cherissa.

En eur ty dister ec'h antre, hac en deus un tam bara :
« Mar plich ganec'h, ur c'hinaouad vit ar c'hy a meus amâ...
» — Perac, eme ar vreg neuze, e virit-hu al loen-ze. (422)
: Pa zeo gür oc'h eus oc'h-unan poan o souten ho pue ?....

» — Ho reproch am scò en c'halon muioc'h eguet na zonzit,
Rac ma voufec'h va oll boannion, na gomzfec'h get vel a rit.
Mar teu din dilezel va c'hy, piou am c'haro bars er bed ?...
En a zo va mignon fidel ; nan.... n'en abandonin get. »

Mervel a ra ar maleurus, ha casset prest d'ar vèret ;
E guy hepken en e heuille, hac en oll digoncertet.
Corf e vestri paotr et en douar, ar c'hy a chommas eno,
Hac antronos, pa errujot, al loen qez a voa maro.

Clêvet ameus, em yaouanqis, comz ourz eur roue puissant,
Pehini ne voa occupet nemet da zastum arc'hant ;
En eur brezel e gemeras eur roue all prisonnier,
Hac er stagas demeus e gar a driomp endro da gutter.

Pa voent rentet en e bales, an orgoull a ras dezân
Disqueuz e appartamantchou d'ar roue maleurus mâin :
— Sell, emezân, eus a bep tu an aour, an arc'hant bernet,
Hac anzar ne zeus bet biscoas gen euruz den var ar bed.

— Sir, eme ar c'hez prisonnier, evit anzar an dra-ze,
Gortozomp ma vezimp rentet betec e fin hor bue ;
Me zo bet ive pell amzer puissant ha meurbet euruz ;
Mes sellit ac'hanon bremâ pequeument our maleurus !... (423)

Emân souden zo rançonnet hac a return prest d'e vro,
 Hac hep dale eo anganjet en eur brezel goal garo.
 Equile d'e dro prisonnier a zo ractal chadennet,
 Ha laget e fong eur prison da zepart beza dêvet.

Berned ezous neuze deuneud evit dont d'en devori;
 O Doue ! me ar malheuris, emâ zo eur maro cri !!!
 Pa voe placet er bern fagot, e c'houlen dre c'hras Doue
 Accordi dezân ar faveur da gomz demeus ar roue.

— Sir, emezân, leun a zaelou, sonjit bars en aroganç
 A zisgeuzis dêc'h em pales; pa voan leun eus a buissanç;
 Ja, hirio me anavez ne zeus nep boneur parfet;
 Grit diouzôn oll a guerst has herves a zeziret.

[—] Deus ganén bremâ d'am pales, eme ar prinç generis,
 Guelet a rân e vi bremâ un den mad ha vertuzus.
 Corrijet demeus da ourgouill hac eus da avariçdet,
 Mar geres epad hor buez e vimp hon daou mignonet.

(424)

Selaouit c'hoas un avantur, mes dreist oll calz plezantoc'h,
 Ha na ello, a gred din-me, nemet dont da blijout deoc'h;
 Mes en eur fêzon differant e prouvo patantamant
 Penos ar giir boneur er bed nes get hepret en arc'hant.

Eur savater a labourne en ur c'hos tam cabrel,
 Gergent ha goulou deiz eno arzet var e scabel,
 Eur blijaour voa e glêvet o cana, o c'huittêllat;
 Guyê e voa evel ~~eur~~ pincin na vije o labourat.

Mes eun autrou, e amezeg, jalous eus an den guyê-mân,
 A deuas un deiz de gavet, hac a lavaras dezân:
 « Terri a res va fern bemdez gant da chansonis deiz nos;
 » Rac-se me as ped da devel ha d'am lezel da repos.

» Dal... cede arze daou c'hant scoët, mes gant ar gondition
 » N'as clêvin mui o ravaudi na gant c'huittel na chanson...»
 Ar savater anter follet, gant ar joa eus an arc'hant,
 A redas d'e gaç d'e vreguis, carguet a gontantamant.

Adalec ar moment fatal m'oe an tenzor en e dy,

486

N'elle na dibri, nac eva, na memes tam fredoni :
 Bepret pluchet var e arc'hant, en deus aoun e vent laeret :
 Adieu d'ar joa ha d'ar boneur, n'en deveus mui a yec'het .

Dispitet eus a guement-se, e qemer prest ar yalc'hat ,
 Hac e red demeus e oll nerz da dy an autrou tîmat ;
 Dalit ho cos arc'hant daonet , sourcen eus va oll boanniou ;
 Me garfe e ve pulluc'het ... Rentit din va chansonniou .

(425)

N'eus get goual bell ec'h erruas d'un den avaricius
 Mont d'e gao evit contemphi e arc'hant a voa en eus ;
 Mes an nor o verza (~~serret~~) varnân en em serret clos eno .
 Na ellas get a sortial , hac e renq souffr ar maro .

Arc'hant ! ô arc'hant milliguet ! nac a zroug ac'heus-te grêt!...
 Arc'hant ! ô arc'hant beniguet ! pet na c'heus get sicouret !
 Oh ! ma vouifet ar joa ardant a santer , pa r'er ar vad ,
 An oll a hastfe da zicour ar paour -q'ez hep heamat .

Un all , dastumer piz ivez , hac en em lezet mancout
 Demeus a voued hac a zillad , hac anfin demeus a dout ,
 Pa voe maro , an invantor na yê get da bêvar scoët ,
 Mes selaouit , me ho suppli , pequement voet estonet .

Un nizes paour en em gavas , hac a voe glac'haret bras ,
 Hac hi goulen vit e loden croc'hen bouret eur c'hos cas
 A voa var un tamic prezic , qempennet qer brao ha tra ,
 Gant un tol bas voe discaret ; mes quelet na pebes joa !

Ractal ar c'has paour zo crevet , hac e ruill var an douar
 Eur glao a louizet aour melen ; d'o dastum prest bras e zoar .
 Dastumet piz ha contet reiz , e caryot p'êvar mil scoët :
 Me ho lez da gonsideri joa an nizes d'o quelet .

(426)

Eur filouter , un reiz marc'hat , a grie var boes e benn :
 « Antreit amâ , mignonet ; deut ... n'ho pezo qeus bigen ;
 » Amâ e tûqewzer an diaoul d'ar re fell deo e velet . »
 Ha gant un hast eus ar brassa , eur foul tied zo antreit .

Ar c'hos coqin a denn qerqent eur yalc'h demeus e c'hodel ,
 Hac a voa gollo en antier , carguet hep qen a avel ;

487

« Ha ! emezân, ha n'en des get an diaoul eo an dra-mañ,
 Digueri eur yalc'h ha nonpas caout netra ebet ennân? »

An aour zo bet idolatret gant ar paour, ar pinvidic,
 Implijet gant profusion en templ caer ha magnific
 Demeus a guder Jerusalem, gant ar roue Salomon;
 Eur dra estranch e zo clêvet ouz se an description.

Piou benac a ell possedi en e dy aour hac arc'hant,
 A dlefe alies sonjal ebars er gontantamant
 A éprouver o soulaji an den a zo maleurus:
 Ze eo sur ar brassa boneur erit an den vertuzus.

(427) Christoph Colomb, den brudet bras, a zigoloas goechal
 Bro an aour, bars en Ameriq, dre 'r speret dreist-ordinal;
 Americ Vespuç, mahomer, goude yas d'ar memes bro,
 Ha dre 'n ingratiri vrassa e ro dezân e hano.

An aour, an arc'hant alies a ra nombr demeziou;
 Rac na zonjer nemet enno erit ober eureujou.
 Ha ma sonchfet mad gouscoude, n'es get se a rent eurus,
 Mes honestis ha carantez, yec'het ha calz a vertus.

Mes, ma ve ret din recita oll effejou an arc'hant,
 Birvigen n'elfen achui, ma comzfen d'am santimant.
 Eur mignon a meus bet quechal, a lavare evellen:
 « Tao va quinou, ha bez ceder, hac e tebri bara guenn. » (historiq.)

Ar meurs, triégont mis quengolo, mil eiz cant pèvar ha triégont,
 Ec'h achu 'r peziou ancien er c'hommerç d'antrèn en cont;
 Er memes devez-se ive e composân va chanson,
 Erit m'ello e peb amzer sonch en deiz-se peb Breton.

Cetu achu va c'hanaouen; scuis œun ouz e c'homposi;
 Me garfe 'teufe peb Breton da brema peb a hini:
 Peziou c'hoec'h ha daouzec guennec, coulz ha pèvar-Varmuquent,
 Louiset aour, ha scoëtjou rognat a recevin evelqent.

Fin.

A. Lédan.